

(225, suite)

## Guérez Neverz

Var sujet ar maleurion euzus êruet dre ar glozeyer horribl coet en  
 fevarizec departamant eus ar c'hreiz de a Franz, ar 27, 28, 29, 30 ha 31  
 eus a vis Here, 1 ha 2 eus a vis Du 1840, hac o deus distrujet nombr bras  
 a querieu hac a vourgon, millierou ties, beuzet euz niver bras a dud,  
 ha goloet 14 lëo douar tro vardro, gant an doureyer spouronus.

Var ton: 'Guerc' hez glorius Vari, Patronez Montroulez.

N'eus qet pell-amzer en boa, an eneres em c'halon,  
 Roet da Vreiz-Itellis eur guir relation  
 Eus an diluch spouronus en deveus distrujet  
 Nomb a querieu, a vourgon, tud hac anevalet.

(226) Mes hirio, va c'henvrois a c'houlen en rimou  
 Ar memes relation demeus ar maleurion:  
 Allas! neo qet eur matier evit bea canet;  
 N'eus fors... Anaveet eo calon ar Vretonet.

Done, crouer an êvou, Majesté adorabl,  
 Deurveit, me ho suppli, dont d'am renta capabl  
 D'ellout dont da explica darn eus ar maleurion  
 Êruet vardro Lyon ha calz all a vroyou.

Eur glas eus ar spontussa, en fin a vis Here,  
 To coet evel euz diluch; an oll a spourone:  
 Seiz devez ha seiz nosvez e zeo coet qer c'hoec  
 Cienvoc'h na elfe bea 'n amzer muia glaoec.

Gergent ar Rhon hac ar Son, diou rivier bras meurbet,  
 A deuas da huellat, da vea debordet:  
 Ar ruyou hac an hentchou chenchet en rivierou  
 A distruje tro vardro... Ô pebes maleurion!!!

An diou rivier o vea neuze-ta debordet,  
 Ne vejont nemet ur mör spouronus da velet:  
 Pénarizec departamant dindan an doureyer!!!...

O Doue, pebes maleur ! peguen terrubl mizer !

Ne ellet douguen sicour nemet gant ar vagou,  
Rac an dud a voa pignet var lein an doennou.  
An c'hri fors, an digesper a voa dre oll eno;  
O clasq donet da dec'hel e cavet ar maro.

(227)

An tocsin spontus a son, hac ar pavillon du  
A velet voa arboret en touriou a bep tu,  
Evit rêi d'anaveout pebes calamité  
A vrêve goalen Doue eno en pep contre.

Mes neo get Lyon hepgen en deveus bet souffret:  
Pêvarzec departamant zo carzi oll beuzet.  
Son-ha-Loir, Cot-d'Or, Isere, Ain, Drom, Doubs, Guenou 1/2 Rhon,  
Jura, Gard, Vauclus, Ardech, Vour, Herault, ha Haut-Son.

En eur vilajen hepgen ec'h assurer eus bet  
Vardro eur pêvar-c'hant den gant an douriou beuzet;  
Eun daou-uguent mil famill rentet en digesper,  
A zo breman reduet d'an terrupla mizer.

E Montmerl e zeus daou-c'hant seiz hor tri-uguent ty  
Discaret; en Coromanch ne zeus chommet hini;  
Frans ha Messini a zo ive distrujet oll;  
Pontdevaux gant an dour bras zo carzi et da goll.

En Maunial eus discaret pemzec ty gant an dour,  
En Feillans pêvar-uguent, hep gallout rêi sicour;  
Ebars eur vilajen all ne chom nemet un ty,  
Er Jone, tri hac antèr-cant: ô maleurion goal gri!

(228)

Daou pe dri dy ha triegont coet en Sant-Clemant,  
En qever bourg Sant-Roman eus coet tost da gant;  
En Draç-ar-Panoux ouспен daou-c'hant zo discaret,  
En Bevil cant antèr-cant a zo ive coet.

En Sablon pêvar-uguent. Anfin, ne eller get  
Niveri an oll distruj a zo bet êruet.  
Gement en em rancontre var hent an doureyer.  
A voa diouc'h-tu ranverset dre oll bars en antier.

229

Pempzec cant den zo eno, hep bara na repu;  
 E class n'em savetai e qerzent a bep tu.  
 Er goe, var an doennou e pignent egaret,  
 Qen a deuit gant bagou evit o c'hemeret.

Eur vreg maleurus, spontet, gant an dour qemeret,  
 Gant ar spouron e deveus bet e speret collet;  
 Hac eur zoudard poursuet dre 'r memes clemant,  
 Zo deuit evel antrajet neuze en eun instant.

(229) Redec ra evel eur foll da glasc caout eur refuch,  
 Aroc an doureyer bras a guez, vel eun diluch;  
 Mes inutil eo deñ, an norjou terret  
 Er priv demeure a repu, ne voar pelec'h monet.

Anfin, anfonç ra eun nor, hac ec'h antren en ty;  
 Eur vreg paour a voa eno doulinet o pedi:  
 Sailla ras gant coumar vras, hac en deus-hi lozget,  
 Ha ne voe nemet gant poan e voe bet qemeret.

An deiz varlerc'h, er prison, e voe oll sebezet;  
 Pa voe lavaret deñ ar c'hrim en devoa grêt  
 E commanças da grial, treantet e galon:  
 Nan! nan! ze n'en dē qet gvir: me zo den a feçon.

Ha possubl ve, va Doue, en be-me coumettet,  
 Me, den honest a vis[coas], eun hevelep torfet!...  
 Evit gvir, assuret voe en e rejimant  
 Coulz hac en e vrô atao eun den fur ha prudent.

En mis Gouere divea, en fonç rivier ar Rhon,  
 Voë gïelet eur men var bini e lennet gant eston:  
 « Nep en deveus vo gïelet, en deus scuillet daelon,  
 » Ha nep am gïelo eun deiz daelon c'hoas a scuillo.»

(230) Nombri an oll maleurion, allas! na eller qet;  
 D'ac'hann eus a bell-amzer ne vo qet o gouezet;  
 Mes, ô Doue! pequen douç eo d'eur galon christen  
 Clevet comz eus a actou meulabl evit peb den.

Ar Roue, ar Rouanez, an Duc a Orleans,

230

Ar Brinnes Adelaïd, c'hoar d'ar Roue a Franç,  
 Bepret carquet a druez, ha leun a larguentez,  
 A roas daou c'hoant mil franc vit sicour an dud qez.

Ar Gouarnamant en deus roet pemp million,  
 Ar ministr arter - cant mil franc en donezon,  
 Vit sicour ar victimou demeus ar maleurion:  
 Graç de da receo soudan nombr eus a fareurion.

Autrou Arc'hescop Lyon, carquet a vadelez,  
 A receo ar victimou ebars en e bales,  
 Ha gant teneridiguez e servich boued dezgo:  
 Ne refus nep maleurus en em bresant ens.

Eur person zo bet gñelet gant eur vagad bara  
 O vont d'en distribui gant eur soign ar vrassa;  
 Gñelet e zeus bet ive mestr - scol, ar breur Cephaz,  
 Oc'h ober actionou demeus a gourach vras.

Da ouспен tri - ugent den en deus bet savet  
 O buez goal exposit, prest da vea beuzet.  
 Nô-de e zê a bep tu, hac en devez gñelet  
 Eun ugent ty o coea prest ma voant sortiet.

(231)

Eur bêleg qez o vont gant eun anteramant,  
 Gant an dour a zo stlappet d'an dour en instant.  
 Ar c'horf maro a ruille gant an dour furorus,  
 Mes attrappet eo buan dre r bêleg courajus.

Autrou Arc'hescop Arignon gant eur vag ya ractal,  
 Ha gantan er memes bag tri viqel general:  
 Ar pèvar bêleg Doue a voa gñisqet en caon,  
 E vit sicour an dud prest da vervel gant an naon.

En Seminer Arignon e zeus bet recevet  
 Tre men pèvar - c'hant paour - qez privet demeus a voued,  
 An doureyer a zave betec an tabernacl:  
 Mes n'oe den ens beuzet; certen dre eur miracl.

Gñelet e zeus en eur guet eur person vertus,  
 Glac'haret oll e galon var an dud maleurus,

O pignat er garidou eus a dour an ilis,  
E zaoulagad leun daelou dre eur glac'har esqis.

(232) Entre' zaouarn e talc'he ar Sacramant santel,  
Hac er zave d'implori an Doue eternal,  
O rêi 'r venediction d'an dud a voa pignet  
Var doennou an tjez, vit bea savetê.

Soudarded en faction a zo bet discaret  
Gant an dour; eurus int bet beza en em dalc'het.  
Redec a rejont d'un tje hac e crimpjont souden  
Vit en em savetai var lein eus an doen.

An officer glac'haret rac aon da zont d'o c'holl,  
A laya clasq ar baguer neuze buan dre oll.  
Eur goberer courajus a ya prest d'o c'herc'het,  
Ha receo eur recompanç en deveus refuset.

Goulennet en deus hepen eno an den vaillant  
Eun dra vit ellout eva eur banne quin-ardant  
Dre ma voa goal fatic bras: Ar general Aymard  
A c'houlen eur recompanç d'an harros mestr gobard.

Vandro pemp cant million e zo bet estimet  
An dommach o deveus grêt ar maleuriou digüet.  
Rac-se eta, christenien, hastomp prest da zicour  
Dre hor generosite victimou eus an dour.

(233) En oll guerion eus a Franç hac ermès anezi  
E teu an oll galonou prim d'en em ampresi  
Gant lealdet ar vrassa hac eus a greiz calon  
Da zicour oll victimou an inondation.

An Esqibien o deveus ive scrifet ractal  
D'ar bersonet vit ober en ilisou qestal  
En faveur ar victimou o deveus bet collet,  
Hac a zo en ezom bras, hac eus a oll privet.

Nan, ne vezimp get bouzar da vouez hor pastoret,  
Na da hirvoudou an dud zo maleurus rentet;  
Er moment-mañ dreist peb-tra a galamite vras,

232

Bezomp - ni oll generus vel ma voemp a viscoas .

Hastomp eta , christenien , da rêi hon offrançou ,  
Rac an ezornou zo bras , ha bras an maleuriou .  
Ni , dreist oll , Breizis christen , bezomp oll generus ,  
Ha sicouromp hon nessa en Hano sac' Jesus .

Christenien ha Francisien eveldomp int ive ;  
Rac-se en em hastomp -ta da rêi sicour d'êza .  
Greomp d'hon nessa ar pezh a garfemp e ve demp  
grêt , ma teufe o maleur da êruout ganemp .

Er baression var ar m'ez e tlefe peb christen ,  
Pa deufe da asista da sul en oferen ,  
Digass euz arc'hant benac evit rêi d'ar Person ,  
Evit sicour victimou an inondation .

(234)

Neo get en v'ez e vo grêt appel d'ar Vretonet ;  
Pa geo ret ober ar void , e zint hastus bepret .  
Ra vo lavaret e zeus en Breiz - Izel ecleo :  
P'eo ret sicour ar maleur , peb Breton mad a glêo .

Er vro quer demeus a Vreiz e ve g'uelet bemdez  
Abers e habitant'et nombr eus a larguentoz ;  
Calz o deus roet sicour vit an dud maleurus ,  
Calz vo c'hoas hoc a royo , balamour da Jesus .

A. Lédan .

(Vol. VII, p. 225-234.)  
strophes non numérotées.